

STAJ KONTADENNOU E KEAV

Pegoulz : Eil sizhun KEAV : eus ar 14 d'an 20 a viz Gouere.

Buhezourien:

- William LANDIN
- Alan TUDORET
- Daniel CARRE (ar meurzh)
- Fanny CHAUFFIN (al lun)

Evit:

Tud oc'h ober war-dro bugale, krennarded... (kerent, skolaerien-rezed divyezhek...); stummerien-rezed e stummadurioù hir; tud o labourat gant an dud war an oad (buhezourien, klañvdiourien...); neb bennak a zo dedennet gant an dañvez MET RET EO GOUZOUT BREZHONEG MAT DIJA!

Palioù:

- Deskiñ kontañ en ur mod hengounel
- Bezañ gouest da gontañ un istor dirak an holl
- Deskiñ penaos e vez lakaet ar vugale, pe ar stajidi (er stummadurioù hir) da gontañ un istor diwar glevet
- Klevout meur a zoare brezhoneg komzet
- Kompren donoc'h ar sevenadur he deus maget ar c'hontadennoù hengounel ha pouez treuzkas an hengoun dre glevet e brezhoneg
- Sevel ur roll kontadennoù prest da implij

Pouezus:

Pep stajiad-ez a glasko dont gant istorioù (daou pe dri) a blij dezhañ/dezhi e brezhoneg evit pinvidikaat anezhe e-pad ar sizhun.

Pep kreisteiz e kinnigo Awenn d'ar stajidi kontañ un istor ganti da vugale ar greizenn dudi (evel he doa kinniget Awenn ar bloaz paseet)

D'ar yaou da noz e vo kinniget ur veilhadek en davarn evit kanañ ha kontañ. Ar stajidi o do c'hoant a vo pedet da gontañ d'ar mare-se

Atalieroù a vo kinniget bemdez hervez ezhommoù ar stajidi:

Hengoun dre glevet: Troioù lavar, divinadelloù, lañsañ/ klozañ ur gontadenn, labourat gant ar pezh zo bet dastumet gant Dastum

Tremen eus ur gontadenn dre skrid d'ur gontadenn a veg

Tapout fiziañs, merañ al leurenn, pleustriñ war arz ar gaou, labourat e vouezh, labourat war an c'hwezh pe an anal, c'hoari gant ar publik

Kontañ er maez, implijout al lec'h hag ar publik evit diorren arz al liamm.

Aozañ ur c'helc'h konterien: Perak? Penaos? Evit piv ?

Impljout ar c'han e-kerzh ur sorbienn

Kontañ er skolioù divyezhek, peseurt obererezhioù evit lakaat ar vugale da gontañ

Sevel abadennoù evit kontañ e brezhoneg, peseurt skouerioù :

Lec'hiou evit kontañ e brezhoneg

Kontadennoù hiroc'h : ar marvailhoù, kontañ er chadenn ur marvailh hir

Pazenoù:

Devezh 1 : Lun

Kelc'h konterien : pep stajiad-ez a gont an istor en/he deus choazet

Kompren nerzh an hengoun dre glevet : kontañ un istor berr dirak an holl.

Devezh 2 : Meurzh

Kontañ gant Daniel Carré

Kontadenn ha kontadenn a zo ; sachañ ha derc'hel an evezh

Brezhoneg ar c'hontadennoù hengounel dre gomz : ur vammenn a-fet yezh evit hiriv

Kontañ : un doare da zeskiñ komz ouzh an dud ha dirak an dud

Devezh 3 : Merc'her

Mintinvezh: Atalieroù

Abardaez: Atalieroù + aozañ ar veilhadez evit tachenn-gampiñ ar vugale

Nozvezh : Kontañ en dachenn-gampiñ dirak ar vugale

Devezh 4: Yaou

Mintinvezh: Atalieroù

Abardaez: Pep stajiad-ez az aio da gontañ e/he istor e pep strollad KEAV => Bilañs

Aozañ ar veilhadez + atalieroù

Nozvezh: Beilhadez en ostaleri

Devezh 5: Gwener

Mintinvezh: Atalieroù

Abardaez: Atalieroù

Devezh 6: Sadorn beure

Bilañs ar staj